

D'an 11 a viz Genver

- E 140, da vare Marcus Aurelius, merzherenti **sant Hijin**, navet pab. Ganet e Bro-C'hres, e voe diuzet eskob Roma e 136. Gwir brederour e talas ouzh an nevousiezh. Dioutañ e teu e vefe roet un tad-paeron hag ur vamm-baeronez e-par ar vadeziant evit harpañ ar bugel en e vuhez da zont. Hag e tivizas ivez e vefe kensakret an ilizoù.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Vital**, penitiour e gouelec'h Gaza. Aet e oa da c'hounid d'ar feiz gisti Aleksandria.

- E 802, e Frioul war harzoù Venezia, distro da Zoue sant **Paolin**, eskob Aquilea a avielas an Avariz hag ar Sloveniz.

Kas a reas da gKarloman ur varzhoneg a-zivout reolenn ar feiz.

- E Breizh, **Merzherion Osismor pe 7777 - seizh mil, seizh kant, seizh ugent ha seizh sant – Lanriware**. Hervez an hengoun lec'hel edo sant Riware - heñvelekaet a-wezhioù ouzh an tiern Riwal, kenderv Fragan - e penn ur strollad kristenion eus Osismor a voe lazhet gant preizhaterion ha sebeliet er vered santel. Hervez lod all, eo e 409 e vije bet argadet gant paganed ur strollad niverus a gristenion eus Gwineventer, en o fenn ur rouanez deol meurbet anvet Terisa. A-hed ar c'hantvedoù eo bet darempredet bered santel Lañriware gant pirc'hrined hag e 1664 e voe arbennet Kenvreuriezh Hollsent Lañriware gant ar pab Aleksandr VII.

- E Breizh, en VIII^{vet} kantved, **sant Maeol** (Gl. Moy), abad e Bro-Roazhon.

- E Breizh, en IX^{vet} kantved, **sant Tezhwiv**, manac'h diskibl sant Konvoion.

- E Kembre, er VII^{vet} kantved, **sant Tegwenn pe Tegenn** (Kb. Tegin), abad Caerwrangon.

- En hanternoz enezenn Vreizh (Skos), er VII^{vet} kantved, **sant Suibhne**, abad enez Iona.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **ar santezed Ethna ha Fidelma**, merc'hed ar roue Laoghaire, kristenaet gant sant Padrig.

- Er V^{vet} kantved, **sant Brandan**, abad a zeuas da Vro-Saoz.

D'an 12 a viz Genver

- E 226, e Roma, merzherenti **santez Tatiana**. Hag hi merc'h ur c'hoñsul, e voe diskuliet evel kristenez ha barnet da vezañ staget a-skourr ouzh piler-kroug ha roget he c'horf gant kriboù houarn.

- E 690, e Bro-Saoz, distro da Zoue ene **sant Benead Biskop**, abad Kêrgent ha diazeour abati Wearmouth.

- E 1166, **sant Aelred**, manac'h saoz, abad manati kisterkiat Rielvaux, « *doazhour ar vignoniezh speredel* ».

- E 1700, **ar wenvidigez Marguerite Bourgeois**, leanez, ganet e Troyes e Bro-C'hall, ez eas d'ar C'hanada lec'h ma tiazegas C'hoarezed an Itron Varia.

- E 1873, e Roma, **ar pac'hiad Giovanni Merlini**, kendiazeour Leanezed Azeulerezed Gwad ar C'hrist gant santez Maria de Mattias. Aliañ a reas ar pab Pius IX harluet e Gaete da ziazezañ Gouel ar Gwad Prizius kent dezhañ adkavout e Stadoù Pabel.

- **Sant Konan**, penitiour en inizi hanternoz enezenn Vreizh (Skos).

D'an 13 a viz Genver

- E 335, ganedigezh en neñvoù **sant Agricius** (Gl. Agrice), eskob Trier e Bro-Alamagn hiziv-an-deiz. Santez Helena a fizias ennañ toneg ar C'hrist degaset eus Jeruzalem hag a zo miret eno abaoe.

- E 368, distro da Zoue **sant Hiler**, eskob ha doazhour eus an Iliz. Anvet eskob Piktavi, bremañ Poitiers e Bro-C'hall, da vare an impalaer Constantius II, hemañ dalc'hiad eus an ariadegezh, e tifennas gant kalon, dre e brezennoù hag e skridoù, feiz Nikaia a-zivout an Dreinded Santel ha doueelezh ar C'hrist pezh a dalvezas dezhañ bezañ harluet e-kerzh pevar bloaz e Frijia. Sevel a reas ivez addisplegadurioù war ar salmoù ha war aviel sant Mazhev. Degemer a reas sant Varzhin hag en e skoazellas da ziazezañ manati Ligugé.

- Er bloaz 400, **sant Viveñz** - Viventius e latin - beleg, diskibl sant Hiler. Ganet en un tiegezh paganed e Palestina pe c'hoazh e Siria e voe gounezet d'ar feiz dre sant Jorj Lydda. Beleg e oa paz erruas en Erbatilicum eleze er C'hlaideg - e galleg Herbauges - a-gevret gant sant Benead ha daou ugent kavandad.

- Er IV^{re} kantved, **sant Leoñs**, eskob Kaezarea, a eskobas sant Gregor, abostol an Armenia.

- Merzherenti **ar sent Gumesind pe Gomez**, beleg, hag **Abdallah**, menec'h o-daou, lakaet d'ar marv e Cordova e 852 dre ma talc'hjont d'o feiz e-tal an Islam.

- E Breizh, er VII^{vet} kantved, **sant Enogad**, eskob Aled. Da gentañ manac'h en enez Aran en Iwerzhon, e teuas da abati St-Yann Gwazel e Devnon an Arvorig, bet savet gant s. Mewen ha lec'h ma voe abad, kent dezhañ bezañ diuzet da eskob Aled e 628, war-lerc'h sant Arzhvael, da vare Haelog III ha dindan pabelezh Honorius I^{añ}. Mervel a reas d'an 13 a viz Genver 631 e Pluvaelgad e Bro-Boudouvr.

- E Breizh war-dro 1108, distro da Zoue **ar Gwenvidig Engelger**, abad, diskibl ar gwenvidig Roperzh Ervrezhel, savour ur minic'hi e koadeg Felger.

- E Breizh, e 1697, distro da Zoue **an Tad François Allain**, beleg dominigad ganet e Gwerc'h-Breizh, brudet evit e vuhez santel.

- **Treuzlec'h relegoù sant Meven.**

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er V^{vet} kantved, **sant Elient pe Helian**, manac'h a ziazezas un iliz eno, hiziv Llianelian e Dynbich. Genidik eus Enez-Von, e vefe mab santez Kana ha sant Sadorn, hemañ breur sant Ildud, diskennad neuze eus Culpurnius ha santez Koñsez, neuze kar da s. Padrig. Diskouezet e vez gant un heizez ha mesket eo bet gant sant Jili e parrez Eliant e Kernev.

- Enhanternoz enezenn Vreizh, e deroù ar VII^{vet} kantved, **sant Kendiern pe Kentigern**, lesanvet *Mungo* o talvazout "an hini karet", abad hag eskob Glasc'ho. mab santez Tenev, diskibl sant Servan, keneil sant Kustentin. Harluet ur pennad e Kembre, e savas manati Sant-Azaf (Asaph). E Glasc'ho e vodas un engroez a venec'h o vevañ diouzh doareoù an iliz kentidik.

D'ar 14 a viz Genver

- War-dro 260, e Nole e Campania, ganedigezh en neñvoù **sant Felis**, beleg ha feizvonnour, genidik eus Siria. Hervez danevell sant Paolin, e voe karc'hariet ha jahinet krizh da-geñver an heskinadegoù ha pa voe peoc'h er vro e vevas er baourentez betek e varv evel m'en doa dibabet.

- E 335, **santez Ninon pe Kristen**, abostolourez Iberia. Sklavez kristen e oa hogen dre he skouer vat, he fedenn hag he burzhudoù e tizhas kalon ar rouanez hag e kanttroas lez ar roue ha pobl Bro-Iberia, bremañ Georgia.

- E 340, distro da Zoue **santez Makrina Gozh**, mamm sant Bazil Kozh, mamm-gozh sant Bazil Meur, sant Gregor Nyssa, sant Pêr Sebast ha santez Makrina Yaouank. Ganet e Neokaezarea er Pont, nebeut amzer goude marv sant Gregor ar Burzhudour, e treuzkasas d'he ziegezh kelennadurezh an den santel. "*Stummañ a reas hon eneoù, eme sant Bazil Veur, dre un deoliezh diazezet war ar gelennadurezh reizh.*" Da vare heskinadeg Maximinus e rankas harluañ e-korf seizh vloaz war ribl ar Mor Du.

- E 402, e Mende en Okitania, tremenvan **sant Firmin**, eskob ar C'habaled.

- War-dro 632, distro da Zoue **sant Fulgentius**, eskob Astigi, bremañ Ecija e Bro-Spagn, breur sant Leandr, sant Izidor ha santez Florenza.

- War enezenn Vreizh, war-dro 480, **sant Erbin a zDevnon**, roue Devnon (Domnonea), abad ha merzher, diazezeur ur manati e Kernev-Veur.

D'ar 15 a viz Genver

- E 390, distro da Zoue **sant Makarios pe Makaer an Egiptat**, abad, diazezeur ha kentañ Tad eus gouelec'h Sete, war wrimenn Libia. Hag eñ kañvaler da gentañ, e teskas digant sant Anton *mervel d'ar bed ha bevañ evit Doue nemetken* hag e kelennas d'e ziskibled d'ober kement-all.

- E 533, ganedigezh en neñvoù **sant Remi**, eskob Reims e Bro-C'hall a vadezas Klodwig, roue ar C'hallaoued. Deuet eus un tiegezh gallo-roman illur eus rannbarzh Lugdunensis, hiziv Laon, en devoe evit mamm santez Selina. Kerkent hag e 22 vloaz e voe dibabet da eskob Reims hag e astennas e abostolerezh betek Belgia. Diazezañ a reas eskobiezhoù Théroutanne, Laon, Arras; sevel a reas ur rouedad skoazell evit ar beorion ; c'hoari a reas an hanterour e-kichen ar Varbared da-geñver an aloubadegoù. Pa gemeras ar penn gall Klodwig ar galloud e kasas dezhañ ur c'hemenn: "*Disamm da gendeodediz, sikour ar reuzidi, gwarez an intañvezed, ro magadur d'an emzivaded.*"

- War-dro 584, distro da Zoue ene **sant Vaour** (Amalrig pe Amaury pe Maur e Galleg), abad, kendiazezeur ar Veneaded. Ganet e Roma, mab ur senedour, e voe fiziet e sant Benead ma teuas da vezañ e ziskibl nesañ ha priol abati Monte-Casino. Kaset da C'hallia evit astenn an urzh e tiazezas abati Glanfeuil, anvet bremañ Saint-Maur war ribl al Liger en eskobiezh Anjev. E relegoù a voe

treuzkaset da Sant-Maur-des-Fossés nepell diouzh Pariz, e 921. E 1618 e voe lakaet e Bro-C'hall da baeron ur c'hevread manatioù beneadat.

- War-dro 710, e Lugdunon - eleze Lyon - **sant Bonitus** (Gl. Bonet), eskob. Kañseller ar roue sant Sigisberzh III e oa ha da c'houde reizhaour e Marsilha lec'h ma tefoulas ar sklavouriezh kement ha ma c'hellas. Diuzet da eskob Clermont war-lerc'h e vreur sant Avit e c'houlenas, war ali sant Tillon, mont da echuiñ e vuhez evel manac'h nemetken en abati Manlieu.

- War-dro 765, e Bro-Saoz, **sant Ceolwulf** (Ceolwulph pe Ceolulph), roue Norzumbria ha manac'h. Den desket ha deol e kavas gwelloc'h lezel ar gurunenn ha mont da vanac'h e Lindisfarn. Dezhañ "ar roue klodusañ" e tedias sant Beda e oberenn *Istor an Iliz*.

- En Iwerzhon, e 577, **santez Ida** – Ide en Iwerzhoneg - abadez, moereb sant Mochoemog pe Kevin, diazezeur manati Cill Ide e kontelezh Luimneach (Limerick).

- Er VI^{vet} kantved, **sant Loudad** - Lleudad e Kembraeg - abad Caernarfon e Kembre. Ambroug a reas sant Kadvan e Breizh-Vihan.

D'ar 16 a viz Genver

- Gant ilizoù ar Reter: **gouel Chadennaù sant Pêr**¹. Sant Pêr a voe dalc'het karc'hariet e Jeruzalem evel ma vez danevellet e Levr Oberoù an Ebestel (kv Ob. 12). Ereet gant chadennoù, Priñs an Ebestel a veze eveshaet noz deiz gant soudarded. En noz a-raok an deiz merket d'e lakaat da dremen dirak al lezvarn, p'edo Pêr o kousket, en em ziskouezas un ael dezhañ. Ar chadennoù a gouezhas eus e izili hag e voe ambrouget hep skoilh, an dorioù o tigeriñ dirazañ, betek an diavaez. Gant doujañs e voe miret chadennoù an Abostol gant ar feizidi hag e vezont kehelet evel relegoù a-briz en iliz Sant-Pêr-Ereet e Roma. En henamzer kristen e oa boazet ar bibion da brofañ d'ar visionerion alc'hwezioù – anezho arouez eus gwaziadezh Pêr - bet goveliet gant metal kemmesket gant un tamm poultr-houarn eus chadennoù sant Pêr.

- Etre 308 ha 309, merzherenti **sant Marsel I^{añ}**, pab. Gouez da sant Damask, e voe ur pastor gwirion hogen fallstamallet gant ar renavidi na asantent ket heuliañ reolennoù ar binijenn, e voe diskuliet ganto d'an tirant Maxentius. Skarzhet eus ar gêr e varvas en harlu.

- E 430, distro da Zoue **sant Honorad**, abad diazezeur Lerina ha da c'houde eskob Arles. Hag eñ o tont eus un tiegezh uhelidi galianromanek eus Trier e voe badezet yaouank flamm a-gevret gant e vreur Venantius. O klask mont gant hent ar beurvadelezh ez ejont gant un trede keneil, Kapraiz, da Vro-C'hres lec'h ma varvas Venantius. O tistreiñ e voe roet dezho gant Leoñs, eskob Frejus, un enezenn eus enezeg Lerina, a-vaez da gCanas, lec'h ma tiazezjont ur gumuniezh senobitek a zeuas da vezañ unan eus pennañ kreizennoù speredel ar vro. Reolenn sant Honorad o pouezañ war stabilhded ar manac'h a vo penn-skouer reolennoù all hag a lakaio da sevel estlamm sant Yann Kasian. Anvet eskob Arles en desped dezhañ e 426, e voe rediet Honorad da guitaat e enezenn. En eskobiezh-se, roget gant an disrann, ec'h adsavas an unvaniezh hag e lakaas da skediñ reizhdred ha santelezh.

- E 648, e Mézerolles e Pikardia, ganedigezh en neñvoù **sant Fursa**, abad iwerzhonat, breur sant Ultan ha sant Follan. Ganet e Gaillimh e voe stummet moarvat gant sant Komgall e Bangor. Prezeg a reas an Aviel e-pad daouzek vloaz en e vro ha da c'houde ez eas da Vro-Saoz lec'h ma tiazezas abati Burgastle er Suffolk. War-dro 646 e teuas e Bro-C'hall lec'h ma tiazezas abati Lagny.

1 Kv. Gouel Sant Pêr Ereet d'ar 1^{añ} a viz Eost.

- E 666, tremenvan **sant Elog**, Iwerzhonad, abad Lagny war-lerc'h sant Fursa. Bez' e vefe breur ar sent Gwaznou, Aelgiz, Boethian ha Monbol.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Ninniz**, manac'h, diskibl sant Finnian Clúain Ioráird.

- En Iwerzhon, **sant Maeliezu**, den santel.

- E 625, **sant Douegile**, Iwerzhonad, diskibl sant Koulman, manac'h gantañ e Luxovium, re gozh evit mont d'e heul war-gae Italia e vanas nepell diouzh Luxeuil da sevel abati Lure (Lutra).

- E Breizh, e 1647, tremenvan **Mamm Jileta a Sant-Frañsez**, karmezadez eus ar Reolenn Gentañ e kouent Nazared e Gwened, e voe dibabet evit sevel kouent Ploermael e 1622.

D'ar 17 a viz Genver

- E 363, er Vermandez e Bro-C'hall, merzherenti **santez Yolen**. Ganet e Roma en un tiegezh patrikianed ez eas d'ar Vermandez, rannvro Saint-Quentin e Bro-C'hall, gant dek keneilez, goude bezañ desket gant santez Benedikt e oa bet merzheriet eno sant Kentin, kar dezho. War-lerc'h bezañ labouret da avielañ ar vro e voe harzet ha jahinet. Da-heul bezañ troc'het daou viz dezhi e voe staget a-istribilh dre he blev hag en diwezh e voe dêvet ez vev.

- Er V^{vet} kantved, distro da Zoue **sant Achil Scete**, unan eus tadoù an dezerzh, anavezet evit strizhentez e vuhez hag e garitez leun a habaskted.

- **Emziskouezadenn ar Werc'hez Vari e Pontmaen** war harzoù Breizh. D'ar 17 a viz Genver d'abardaez, tra ma veze dalc'het e Sant-Brieg e Breizh, gant miliadoù a feizidi, diwar gemenn gourdrouzus denesadenn ar Brusianed ouzh ar vro, ur veilhadeg pediñ kadoriet gant an eskob e brientiliz Itron-Varia ar Goubeizh, en em ziskouezas ar Werc'hez Vari da vugale yaouank, war harzoù Breizh, e Bro-Genoman, e parrezig Pontmaen a oa bet gouestlet gant he ferson da Itron-Varia ar Goubeizh, dres e liamm gant santual Sant-Brieg. En oabl lec'h ma arvestent ouzh ar Werc'hez, dezhi ur vantell steredennet, e teuas war wel lizherennoù aour o tegas da gemennadenn: "*Pedit c'hoazh, va bugale, Doue ho selaouo a-benn nebeut amañ, va mab a zo tener e galon.*" Hag e paouezas an emgannoù en devezhioù war-lerc'h tra m'en em ledas kemenn ar goanag o c'hervel d'ar bedenn.

- E Breizh, e 1722, distro da Zoue **ar pac'hiad dom Yann Leuduger**, beleg, diazezour *Merc'hed ar Spered-Santel*, prezegour misionoù ha retredoù e Breizh-Uhel, kenlabourer an Tad Juluan Maner.

